

Of Men and Mice, ur film re uhelek evit e furmad

« Of Men and Mice » a zo ur berrfilm gall deuet er-maez d'an 21 a viz Du 2015, sevenet gant Gonzague Legout ha produet gant Pascal Légitimus.

Heuliañ a reer, er berrfilm moliac'hel/S-F-se, tudennoù Neil ha Nicholas, daou c'hoprad-bet ul labouradeg kirri-tan eus Detroit, bremañ aet da baour, hag a ziviz tagañ un ti-bank, berr spontus an arc'hant ganto. Met netra ne c'hoarvez evel ma vefe dleet, gronnet int gant ar polis e-barzh an ti-bank, hag a ro dezhe an urzh dic'hortoz na lezel den ebet da vont maez. An abeg : kontamnet int bet gant ur viruz arnodet war logod, ha gant ar viruz-se e vint troet buan da zelwenoù maen.

Istor Of Men and Mice a c'hoarvez neuze e Detroit, ur gêr a zo bet ganti ul lañs ekonomikel bras adalek ar bloavezhioù 1900 gant ar « Big Three » (Ford, Chrysler ha General Motors) hag o deus reveulziet al labour a-steud. Da heul al lañs-se, poblañs Detroit a zo bet kresket bras betek ar bloavezhioù 50, gant 1,8 milion a annezidi, deuet da vezañ neuze pevare kêr ar Stadoù-Unanet. Met goude an Eil Brezel Bed, ekonomiezh ar gêr a ya d'ar strad, gennad ar c'hirri-tan a dal ouzh kevezerezh ar bed a-bezh (hini Azia dreist-holl), tra ma 'n em gav dilabour implijidi al labouradegoù-se. Ur gêr dilezet eo Detroit bremañ : ar boblañs a zo tremenet evit ar wezh kentañ dindan ur milion a annezidi e 2000. Gwasket hiziv an deiz gant un dle a 18 miliard a zollaroù, Detroit he deus disklêriet ez-ofisiel d'an 18 a viz Gouere 2013 bezañ graet freuz-stal.

D'am soñj e tap brav ar film diverrañ ar c'hendestenn sosio-ekonomikel-se (hag a zo kemplezh a-walc'h) gant ar pennadoù kazetenn er senenn digeriñ, ha me gav din ez eo dedennus tre e kemerfe plas ar film en ur c'hendestenn wirion. A-hend-all e c'heller sellet ouzh skeudenn ar c'hleñved-red hag a skorn – ent strizh – pep tudenn tro-ha-tro evel ur seurt leterc'had eus emdroadur ekonomikel skornet Detroit, hag a sonn e annezidi, hag en em gavont evel stanket er gêr-se. Kavout a ran eo bet kompezet mat kenedelezh ar film evit taolenniñ un aergelc'h ankenius ; ar gouloù, al livioù ha dreist-holl ar muzik hag a glot dreist gant skeudennoù ar film, a ra d'ar senennoù bezañ enkrezus avat. Hag an diouer a c'hinkladur a ro ar santad da vezañ bac'het, hag a adkas deomp menoz logod en ur gaoued. Ne oa ket dispar an efedoù arbennik, met dereat tre memestra evit ur berrfilm, lec'h m'eo treut a-walc'h ar voujedenn. An daou laer a seblant bezañ dizurzhet ha streset, 'pezh a ra dezhe bezañ hoalus, met pas a-walc'h evidon, da sevel ennomp ur c'henhoal, un empatiezh vras evito, pezh a zo domaj, rak seul nebeutoc'h a from a zo neuze gant ar film (memes pa ouzer penaos int en em gavet d'ober se). Daoust m'eo gall ar film, e stil a zo amerikan tre a gav din, e ton ar c'hendivizoù dreist-holl (da skwer, Neil ha Nicholas eo dizoare a-walc'h o lavar) ha gallout a rafed rebechiñ d'ar film e senenn zivezh kliched tre gant ar vouezh dramaek war ar skramm du. Din-me, an tech pennañ a c'hellfen kavout d'ar film-se, eo e seblant kaout na deroù gwir na disoc'h gwir, ar santad on eus na gaout ken nemet un troc'h eus un hirfilm. Da glozañ, mennozh ha kendestenn ar film a zo dedennus hervezon, met re verr eo e furmad ervat evit senario uhelek Of Men and Mice, d'am soñj ne zeu ket a-benn da gas an dud d'en em soñjal evel ma felle d'ar sevenerien moarvat (evit un afer a arc'hant emichañs). Ar film ne ro ket tro deomp d'en em dommañ ouzh tudennoù Neil ha Nicholas, hag a c'hellfe bezañ bet fromus kenañ koulskoude, ma vije bet astennet o istor, tremened ha personelezh (un tamm diaes d'ober e-korf 20 munut, evelato). Ar film-se a ziskouez splann ur c'hemm er c'hendestenn (ekonomiezh Detroit) met ivez en

tudennoù (o zro-spered, penaos int en em gavet aze) a vefe diskouezet gant kalz muioc'h a from, a skog gant un hirfilm.

Me garfe gwelet petra rofe ar berrfilm-se ma vije graet un hirfilm anezhañ, rak danvez zo ennañ evit en ober.

De Yuna DRAPIER

2nde4, Lycée Jean Macé à Rennes